

KANNAD

AR

GALOUN-ZAKR



Al levrik-ma a zigouezo er parrezioù abenn ar zul diveza a bep miz. — 6 real a gousto ar bloaz, da goumans e miz Genvver pe e miz Gouere.

Enn eur c'houlen ar C'HANNAD, skriva ha digas *dioc'htu* an arc'hañt d'an
Ao. BOULIC,
Aomonier ar Retred,
Kemper.

Kaloun-Zakr a Jezuz, grit m ho karimp muioc'h-mui.

KEMPER, E TI DE KERANGAL, MOULLER ANN ESKOPTI

ABOSTOLAJ AR BEDEN

INTANTIONOU MIZ C'HUEVRER 1915

INTANTION JENERAL merket a-berz an Tad-Santel ar Pab ha benniget ganthan :

AR VODESTI KRISTEN


Intantonou all evit peb deiz euz ar miz :

- 1 Dillun. — *S. Ignas, merzer.*
Gouzanv gant patiented.
- 2 Dimeurs. — *GOUEL AR CHANDELOUR.*
Ar zentidigez.
- 3 Dimerc'her. — *S. Jildas, abad.*
An drugarez.
- 4 Diziou. — *S. Andre Korsini, eskop.*
Aked evit an eneoù.
- 5 Dirguener. — *GUENER KENTA. — Stez Agatha, g. ha m.*
Gouzout en em zakrifia.
- 6 Disadorn. — *S. Tit, eskop.*
Karet an Iliz.
- 7 Disul. — *SEXAJESIM. — S. Romuald, abad.*
Ar binijen.
- 8 Dillun. — *S. Yan Matha, kovesour.*
Karet an nesa.
- 9 Dimeurs. — *S. Cyrill, eskop Alexandri ha doktor.*
Sonjal e traou mad.
- 10 Dimerc'her. — *Stez Scolastik, g.*
Beza a unan gant Doue.
- 11 Diziou. — *Apparition ar Verc'hez e Lourd.*
Beza devot d'ar Verc'hez.
- 12 Dirguener. — *Ar 7 Foundatour Servited.*
Deveriou ar stad.
- 13 Disadorn. — *Stez Katarin a Ricci.*
Implija mad hon amzer.
- 14 Disul (40 heur). — *QUINQUAJESIM. — S. Valantin.*
Beza humbl.
- 15 Dillun (40 heur). — *SS. Faostin ha Jovita, m.*
Beza a unan gant Jezuz poaniet.
- 16 Dimeurs (40 heur). — *S. Onezim, eskop.*
Ar fisianz.
- 17 Dimerc'her. — *AL LUDU. — S. Gregor X, pab.*
Beza distag dioc'h traou ar bed.
- 18 Diziou. — *S. Hyjin, p. ha m.*
Ar gourach.
- 19 Dirguener. — *S. Gabin, m.*
Sonjal er basion.
- 20 Disadorn. — *S. Eleuther, eskop.*
Beza madelezuz.
- 21 Disul (kenta er C'horaiz). — *S. Felix, eskop.*
Aked evit servich Doue.
- 22 Dillun. — *Kador S. Per en Antioch.*
Aked evit an Iliz.
- 23 Dimeurs. — *S. Per Damian, eskop.*
Karet ar gerent.
- 24 Dimerc'her. — *S. Mathias, abostol.*
Douja da Brovidanz Doue.
- 25 Diziou. — *S. Leandr, kovesour.*
Sonjal er maro.
- 26 Dirguener. — *S. Viktor, kovesour.*
Delc'her d'ar vuez kristen.
- 27 Disadorn. — *Stez Mac'harit a Gorton, penitantez.*
Glac'har d'ar pec'hejou.
- 28 Disul (eil er C'horaiz). — *S. Ruellin, eskop.*
Karet beza sioul.

Imprimatur

Kemper, 25 Genver 1915.

† ADOLPHE DUPARC,
Eskop Kemper ha Leon.



SETU AMAN MAP AN DEN

a zo ive Map Doue
dispennet, goumpet, disprijet abalamour d'hor pech-hejou.

25^e blavez. † Adveniat regnum tuum! † C'HUEVRER 1915.

KANNAD AR GALOUN-ZAKR A JEZUZ HAG AR GALOUN DINAM A VARI

Intantion jeneral evit miz C'huevrer 1915 : Ar voderi kristen. — D'ar Zelaturien ha d'ar Zelaturezed. — Feiz hor soudarded. — Pedomp a zevri. — Ar beden hag ar viktor. — An Aotrou Kardinal Mercier prizouniet gant an Allemanted. — An Tad Santel ar Pab ; Peden evit ar peoc'h. — An triduum e Pontmain. — Ar 40 heur. — Tinzor Kaloun Jezuz.

*Dioc'h ar skoliou dizoue ha dioc'h ar vistri difeiz,
Diouallit ac'hanomp.*

ABOSTOLAJ AR BEDEN

Emgleo etre ar re a fell dezho pedi, labourat, gouzany a unan gant Kaloun Jezuz.

Intantion jeneral evit miz C'huevrer 1915,

MERKET ABERZ HON TAD SANTEL AR PAB BENEAT XV HA BENNIGET GANTHAN

AR VODESTI KRISTEN

I

Ar voderi kristen a zo eur pleg mad euz hon ene a vir ouzomp da lezer aziabarz ennomp sonj ebed hag a zianveaz en hon doareou netra ebet ne ve ket deread ervez hor stad hag a ve kountrol d'an honestiz. « Arabad e ve ennoc'h netra, eme sant Aogustin, a c'helfe ofansi daoulagad den, mes red eo e ve ennoc'h peb tra ervez santelez ho stad. » Ar voderi 'zo

unan euz ar c'haera ha talvoudusa traou oufet da velet.

N'euz koanteri ebed da veza lakeat e kemm gant an doare dudiuz a ro d'eun den iaonank, goaz pe vaouez, ar guir vodesti. Ar mammou kristen a dle ho c'haloun tridal gant ar joa pa velont ar vertuz ma o para en ho bugale. Netra guelloc'h ne verk n'o deuz ket kollet ho foan gantho, rak diskleria 'ra ha difen a ra er memes amzer glander ha santelez ho ene. Ha n'eo ket dioc'h an naodoziou e c'heller gouzout ha renket mad ha trei mad e ra rojou eun holoraj a ziabarz? « Dioc'h he vizaj, eme ar Spered Santel (*Eccl.*), e vez anavezet an den. Dioc'h he zoare d'en em viska, da c'hoarzin, da vale e ouezer pe seurt den eo. »

Ervez ar zent oll, red eo beilla var skianchou ar c'horf evit en em zionall dioc'h ar pec'hed hag evit kreski er zantelez. Ar skianchou a zo prenezeier ha dorjou hon ene, hag ar profed Jeremi a lavar : « Ar Maro a zo pignet dre ar prenezeier ». Pa vez doriou eun ti sarret ha diouallet mad, netra ne loc'ho euz an ti ; mes m'ar bezont digor, ma n'euz den oc'h ho diouall, m'ar gell peb unan mont ebarz ha dont er meaz pa gar, ne vezer ket en asuranz en ti-ze, ha kement munud vad zo enghan a vo sammet kuit. Er memes tra a c'hoarvez gant an ene. Ar re o deuz soursi da zionall mad doriou ha prenezeier ho skianchou, ar re-ma a vevo e stad santel hag er peoc'h a deu da heul ; mes ar re n'o diouallint ket n'o devezo na peoc'h na renoz en ho c'haloun, hag ar vertuziou kristen a vo bannet er meaz anezhan.

II

Ar vodesti kristen a zo eur guir brezegen. Lenn a reer kement-ma e buez an den mad ha meurbed santel sant Francez Assiz. Enn dervez e kemeraz ganthou unan euz he venec'h : « Deomp da brezeg », emezhan. Setu hi ho daou er meaz euz ar gouent. Gonde beza great tro kear, e tiztrojont d'ar gouent. « Tad, eme ar manac'h, ne brezegimp ket ta ? » — « Great eo ar brezegen, » eme ar zant. Guir a lavare : en eur vont dre ar ruiou gant eur vodesti parfet o doa great da gear oll eur brezegen vad.

Traou zo ne greder ket lavaret, chestou zo ne greder ket ober, tresou 'zo e ve mez oc'h ho c'hemeret, sonjou 'zo zoken ne greder ket delc'her er spered, pa vezer dirak tud hag a zo ar guir vodesti en ho c'haloun hag en ho doareou a zianveaz. Ar re oar an an neubenta en em zalc'her, p'en em lakeont d'ho zarempred, a gemer neubent a neubent ar memes plegou hag indhi.

Ar vodesti a zo guiskamant ar c'hristen. An hini en doug a c'hell kounta en devezo brasoc'h sikour digant an Aotrou Doue. Modest e vezer pa zonger gant respet en ene tinzor dispar ar stad a c'hraz, a ro deomp perz e buez Jezuz-Krist hag a ra ac'hanomp templou ar Spered Santel. « Respectit oc'h izili, eme sant Paol, hag henorit ho korfou rak bez int tiez an Aotrou Doue. »

An den modest a zo evel ar beleg, a ia dre ruiou hor c'hearion braz da gas an Aotrou Doue d'ar re glanv. Abaoue m'euz difen da gas ar gommunion gant solanite ebed, ar beleg a ia gant ar viskamant a zong e peb mare euz an deiz ; netra ne verk e ma Jezuz-Krist ganthou, nemed e vale gant muioc'h a evez, e tiouall da zellet neubentoc'h c'hoaz en dro dezhan, hag e chomm sioulloc'h. Evelse e kerz ar c'hristen a oar pe seurt tinzor e tong a ziabarz enghan, hag e ra honor dezhan dre he vodesti.

III

Ar vodesti a zo ar viskamant pe ar vantel a c'holo an ene hag a vir anezhi neat ha glan. Nep en deuz soursi da zavetei he ene a dle eta poania evit beza modest en he zonzou, en he gomson, en he zellou, en he zoareou hag en he viskamant.

EN HE ZONJOU. — Ken braz eo an danger evit an ene aberz ar sonjou fall, m'en deuz great an Aotrou Doue eur goure'hemen (an naved) evit ho difen.

An drouk spered, euz he gostez, o c'houzout pegen buan e rinkler er pec'hed dre ar sonjou-ze, a zil anezo aliez aliez e spered an den. Gouskoude ne vez pec'hed nemed ma vez dalc'het gant evez an traou-ze er spered, ha m'en em blijer eunho.

Setu perak, kerkent ma tenont er spered, e ranker raktal ho strinka kuit en eur lavaret eur bedennik d'ar Verc'hez dinam, oc'h ober sin ar groaz, o tistrei diontho hor spered en heur zonzal en eun dra benag all, ken trumm ha ma ve strinket kuit eur c'hlaouen ruz kuezet var an dourn. Pa groger gant an dourn en eur c'hlaouen ruz, ma tiskroger dioc'htu, ne vezer na devet na glazet. Mes ma talc'her anezhi, ha ne ve nemed eur pennadik, an dourn a vez devet hag e vez poan. Evelse e c'hoarvez ive evit ar sonjou fall ; red eo ho stleper kuit dioc'htu, anez e reont en ene eur gouli meurbed grevus hanvet ar pec'hed.

EN HE GOMSOU. — Ar c'hristen ne dle ket beza tenval he benn, Done a c'houlen zoken diganthen, ma vo laouenn. « Bizaj an den just, eme ar Spered Santel, a dle beza laouenn bepred » (*Eccl.*, xxiv, 4).

Bez ez euz avad eul laouenedigez a zo difennet gant lezen Done : an hini a deu da heul ar c'haoziou diskempenn a vez klevet. Lavaret komsou ndur, komsou druz a zo eur goall bec'hed enep ar vodesti. Dre ar c'homsou-ze e vez louzet teod an hini ho lavar, ha louzet eneon ar re ho c'hlev, evel ma vez louzet eur zae venn gant strinkadennon dour anouez. Kalz tud zo breñn ho ene gant ar pec'hed mezuz dre m'o deuz desket ar pec'hed-ze, dre m'o deuz sonjet ennan o klevet komsou loudour.

Brezel ta d'ar seurt kaoziou-ze, a vez klevet ken stank, siouaz ! etonez ar gristenien, hag a dlefe ho lakât da eugi, ma vent guir gristenien. Ar mestr, ar vestrez e pep ti a dle difen gronz e ve lavaret en ho zi hag etouez ho zud, netra kountrol d'ar vodesti.

EN HO SELLOU. — Done en deuz lavaret : « Daoulagad ar re zizkiantet a zo egaret » (*Prov.*, xvii, 24).

Diskiantet int e guirionez, pe da vihana goal diaviz ar re a zell dalc'hmad en dro dezho, hag a fell dezho guelek kement-ze. Perak ez int diskiantet ? Abalamour, evel m'on deuz lavaret varlerc'h ar Spered Santel, ar maro pe an drouk en em zil en ene dre ar skianchon evel dre brennezier.

Dre an daoulagad, an drouk-spered a zil er galoun

c'hoantegeziou fall hag er spered sonjou fall ha skeudennou divalo. Arabad eo eta digeri an daoulagad nemed kement ma 'z eo red pe zeread. Ervez an Tadou Santel, evit beza kristen parfet, e ranker beza dall, bouzar ha mud. N'eo ket da lavaret e ve red moucha an daoulagad, stanka an diou-skouarn, ha naska an teod. Nann. Mes red eo beza dall e kenver an traou fall o viret da zellet outho, bouzar evit miret d'ho zelaou, ha mud evit miret da lavaret komsou dizhonest.

Beilla mad a dleer eta var an daoulagad evit na jommint ket da bara var dud, var skridou, var imachou a c'helfe elumi er galoun tan ar goall ioulou. Eun eulven epken a zo aoualc'h evit lakat an tân goall da gregi.

EN HE ZOAREOU. — N'eo ket difennet d'ar gristenien kaout doare vad, beza deread e peb tra, gouzout penaoz en em zalc'her dirak an dud, penaoz bale. Muic'h a respet a vez evit an den en deuz doareou mad. Ar pez zo kountrol d'ar vodesti eo en em ijina da fougeal gant ar goanteri e c'heller kaout e doareou ar c'horf pe an izili. Hen-ma pe hou-man a gav ez eo re izel he vent, a lakaï sao dindan he vontou ; eun all a zavo he vleao evel kribel eur c'hillog evit diskuez en deuz eur pennad bleo kaer ; eun all a valeo sounn ha rent evel eur geunenden, o sonjal e vo meulet evit he ment ; eun all a vuzc'hoarzo ouz an oll evit diskuez e deuz dent kaer. Eun druez eo guelek an oll arieziou, an oll ardou a ra lod deuz an dud, a zo ken goullou ho fenn hag ho c'haloun. Petra c'helfet gedal digant ar re-ze evit ar vuez kristen ? Penaoz e sonjfe e Done tud ha n'euz nemed avel en ho fenn ?

EN HO GUIKAMANT. — Ar vodesti a veler dreist oll dre ar vizkamanchon a zonger. Ne ve ket mad beza louz ha diskempenn, memes var ar pemdez pa labourer. Ar gristenien vad a ouezo ato kemeret dillad deread ervez ho stad hag ho dougen en eur fesoun deread. Mes aman adarre e ve kalz da lavaret e kenver ar vodesti. Nag a bed, ar plac'hed iaouank dreist oll, ne ouezont mui penaoz en em lakât evit beza

braoc'h eget ar re all. Eur vez oa gnelet, n'enz ket pell c'hoaz, penaoz e veze fagotet merc'hed kear. Ho dillad a veze moulet ken start var ho c'horf paour, ma vije bet koulz dezho beza noaz. Memes var ar meaz, e karteriou-ze, a vez ken dispak gant ar merc'hed ho gouzouk hag ho stomok, ma 'z eo eur vez ho gnelet.

Ken euzuz int e meur a garter, m'o deuz ranket an Eskipien sevel ho monez enep ar gizion iskiz-ze ha gourdrouz ne vije ket roet ar Gommunion zantel d'ar merc'hed a vije divodest en ho guizkamant.

Ar mammou a zo da damall var ar poent-ma kement ha muioc'h eget ho bugale.

M'o divije eur guir feiz, eur feiz birvidik, ma sonj-fent ez eo ene ha korf an den ti an Aotrou Doue, ez omp izili Jezuz-Krist, hag e ma daoulagad hon Tad euz an env hag hor Barner o para varnomp, daoust hag izoum a ve digas da zonz e rank an den miret ar guir vodesti a ziabarz hag a zianveaz.

Gant sikour graz Doue, dihunomp ar feiz en hor c'halonou, lakeomp enno guir garantez an Aotrou Doue, hag hor c'horf a viro mad ar vodesti a dlekaout. Ra vezo hor c'halonou envelloc'h ouz Kaloun Jezuz, hag e poaniimp da veza ive a zianveaz envelloc'h outHan.

Peden pemdeziek.

« Kaloun Sakr Jezuz, kinnig a ran deoc'h, dre
 > Galoun dinam Mari, pedennou, oberiou ha poaniou
 > an dervez-ma, evit digoll an dismegans great
 > deoc'h dre hor pec'hejou, hag evit an oll menno-
 > ziou m'en em ginnig evitho epad an oferen.

> Ho c'hinnig a ran, dreist oll, evit ma vo anavezet
 > guelloc'h ha karet muioc'h ar vodesti kristen, hag
 > evit ma teui an oll d'ho karet ha d'ho servicha ep
 > ean beteg fin ar bed. »

DA OBER : *Miret hon unan ha lakât miret gant hon tud ar guir vodesti kristen.*

D'ar Zelatourien ha d'ar Zelatourezed.

Miz C'huevrer 1915. — Ar Guener kenta euz ar miz a dle beza konzakret da henori ar Galoun Sakr. — An honor ze, al lid-ze a oue ive goulennet gant Hor Zalver digant ar P. E. Ma-c'harit Mafi. « Eñn dro, emezhi, ar Zakramant meulet ra vezo a ioa var an aoter. Hor Zalver Jezuz-Krist en em zikkuezaz d'inn, skeduz en he c'hloar. Dizelei a reaz d'inn he Galoun meurbed din a garantez, en eur lavaret :

« Taol evez mad ouz va c'homsou hag ouz ar pez
 > a c'houlennan diganez ! Kommunia a ri, bep *Gue-*
 > *ner kenta bep miz* evit rapari, e kement e ma en da
 > c'halloud, an ofansou ha dismegansou e meuz gou-
 > zanvet epad ar miz er Zakramant meurbed santel. »

Ar c'hiz devot da henori Kaloun Jezuz d'ar *Guener kenta er miz* a zo bet kavet mad gant an Iliz. D'an 21 a viz Gouere 1899, an Ao. Kardinal Mazella, prefed al Lidou, a skrivaz da oll eskipien ar bed katolik evit alia anezho oll gant tiz euz perz an Tad Santel Leon XIII, da boania en dra c'hejant da skigna e peb leac'h devotion ar Galoun Sakr.

« An Tad Santel, emezhan, en deuz eur c'hoant birvidik e ve great e peb bro lid kaer ar guener kenta er miz en honor d'ar Galoun Sakr. M'ar bez heuliet etouez ar bobl kristen, dre 'n hentze e vezo diskleriet dalc'hmad ar guir en deuz bet Jezuz-Krist digant he Dad da veza rone ar bed oll, guir gounezet ganthan pa brenaz ar bed en eur skuill he c'hoad. Gounezet gant an henoriou-ze, Jezuz Krist, ken pinvidik a drugarez ha ken douget da garga an dad euz he vadoberiou, a ankounnac'hañ ho maliz. Astenn a rañ d'ezho he zivreaç'h, nann epken evel da zervicherien fidel mes evel d'he vignouned ha d'he vugale muis karet. »

Petra da ober evit henori Kaloun Jezuz bep Guener kenta er miz ?

D'ar iaou d'abardaez, eme an Tad Croizet, red eo en em brepari d'an deiz Guener en eur lenn eur skrid

devot divar benn devotion ar Galoun Sakr, hag o chomm eur pennad benag dirak ar Zakramant meulet ra vezo.

Setu aman evit ar Guener petra zo mad da ober :

1^o En eur zihuna, e vo kinniget da Galoun Jezuz oll oberiou an dervez. Kerkent ma vezer savet e c'heller, evel m'eo deuz great meur a ene santel, stoui ar penn beteg an douar, o trei varzu an iliz tosta, a zo enghi ar Zakramant. Er stad ze e vo mad ober eun akt a feiz, adori Hor Zalver Jezuz-Krist, hen trugarekât da veza roet deomp Sakramant he garantez, ha lavaret dezhan ar glac'har a vez oc'h he velet ken disprijet, hag ar vail a vez da vont ar c'henta posubl d'he gaout, hag ar c'hoant d'he garet eb ehan ebet.

2^o Mont da govez, kenta ma vo gellet, ma n'oar ket bet en deveziou arsak, hag anzav dreist oll an defot a respet a ve bet e kenver ar Zakramant, dreist oll o veza bet gourd d'he reseo er gommunion.

3^o Pedi a galoun, en eur zonzal e madelez hag e poanion Kaloun Jezuz.

4^o Ober ar *Gommunion a raparation* evit seveni goulen Kaloun Jezuz.

5^o Klevet an oferen en honor d'ar Galoun Sakr.

6^o Lenn eun akt a gonsekraton pe ean amand honorabl da Galoun Jezuz. — An Tad Santel Leon XIII en deuz gourc'hemennet ma vije lavaret, bep guener kenta, Litanion ar Galoun Sakr aotreet ganthan ha konsekraton ar bed skrivet ganthan.

Mad e ve ive d'ar re her gello mont en dervez-ze da vizita ar Zakramant evit trugarekat Jezuz euz he oll vadoberion ha rapari, goulen he c'hrason evitho hag evit ar re all. Ar re ne c'helfent ket mont d'an iliz a raio kement ze el leac'h ma vezint, a spered hag a galoun.

Evit honori Kaloun Jezuz o leski hag o vervel evidomp, ez eo mad kenan ober *Hent ar Groaz* d'ar Guener kenta pe d'ar zul. — Mad e ve ive ober en dervez-ze eur binijen benag en honor d'ar Galoun Sakr. Ne vezer ket devot d'ar Galoun Santel ma ne vezer ket troet da ober pinijen. — D'ar Guener kenta e tleer ive en em jala, hed an deiz, da *garet ep ean*

Hor Zalver Jezuz-Krist. An dra-ze e c'heller ober en eur labourat, en eur vont hag en eur zont gant ma vo klasket tevel, ar muia ma vo gellet.

Pe seurt grasou a c'hounezet o santifia ar Guener kenta ?

Kaloun Jezuz en deuz promettet e *vezer sikouret vetepanz d'an heur ar maro*; ar re o do kommunit epad nao miz d'ar Guener kenta, en deuz promettet dezho e *kendalc'hint e gras Doue beteg ar fin*. Setu ar pez a c'halver ar *bromesa veur*.

Oc'hpenn 'zo : dre lidou ha pedennoù ar Guener kenta e vez *lakeat Kaloun Jezuz da zilaou hor pedennoù gant madelez*. Ar P. E. Mac'harit Mari, pa falveze ganthi kaout eur c'hraz vraz, en em zerviche peurliesha deuz pedennoù ar Guener kenta.

An eneoù aflijet a gav e pedennoù ar Guener kenta *nerz ha konsolation* en ho foanion. Pev Guener kenta a zigase da Vac'harit Mari eur c'hraz kaer benag.

Erfin, ar *vuez kristen* a vez *nevezet ha krenfeat* er parrezioù a vir ar Guener kenta en honor d'ar Galoun Sakr. Eaz e ve rei a villeroù skuerioù a gementze Eüruz ar bastored a ra miret gant lidou a honor en ho farrez ar Guener kenta gant ar Gommunion a raparation. Ar Galoun Sakr ne zaleo ket da rei dezho ar konsolation da velet ar *vuez kristen* o kreski en dro dezho gant an oll vertuzioù e laka da vleunia.

FEIZ HOR SOUDARDED

90 dre gant a lavar ho fedennoù mintin ha noz. — An Ao. Lacroisset, kure Sant-Paol-les-Dax, eil-letanant er 144^e var droat en deuz skrivet kement-ma :

« Aman, ep mar, 90 soudard dre gant a lavar ho fedennoù mintin ha noz. 4 dre 5 deuz ar re n'ho lavaront ket, n'ez eo nemed abalamour ma tizonjont.

Na pebez chenchamant en eneo hor soudarded ! Ha kredi a rafec'h, on deuz roet, an Ao. Aomonier ha me, oc'hpen 500 kommunion, dillun ha dimeurs. »

* * *

Konvertiset en he heur diveza. — Skrivet gant eur persoun a gichen Paris, infirmier e tu Verdun :

« Ar glanvourien en em gav stank. Deac'h eo maro eur mestr skol laïk deuz Paris. Ne ouie ket an disterra peden. En em breparat en deuz evel m'eo dleet da vont d'ar bed all. Araok mervel, en deuz koveseet ha kommunit. En he aliou diveza d'he c'hreg, en deuz pouezet dreist oll evit ma savje ho bugale evel kristenien. Joa a ioa oc'h he glevet. M'ar gra kalz drouk ar vrezel, setu ive eur skuer euz ar vad a ra. Nag a bed a zistroio da Zouë, ha ne vo nemed Doue oc'h her gouzout ! »

* * *

Protektion Doue. — Lizer eur zoudard d'he vignoun :

« Goulen a rit diganen penaoz ez oun bet ken tost d'ar maro, ha n'oun ket bet lazet. Setu aman : en oll emgannou ez oun bet enno, epad ma kueze en dro d'inn ar bouliji ken puil hag ar glao, e lavaret, bep kamed a rean, hanoiou *Jezuz* ha *Mari*. Evelse e kueze a bep tu d'inn an tennou ep ma vijen tizet. Eveseat e meuz ive, er c'hrogad diveza on deuz bet, p'edomp o sailla var an enebourien gant ar vaionetez, ne m'ez ket lavaret *Jezuz* ha *Mari*. Gellet e m'ez evelato tec'het diouz ar maro dre vertuz ar vetalen o poa roet d'inn hag ar pedennou a ran bemdez.

» Ar vrezel man e do chenchet meur a hini n'o doa soursi ebed beteg hen gant ar relijion. Evelse, eur guchen deuz va rejimant, paotred dibenn, anavezet mad, me m'ez ho guelec'h o tougen unan eur chapeled en dro d'he c'houzouk, eun all en dro d'he vreaoc'h, eun all eur vetalen spillennet a vel var he gapoten. Kalz re all, oc'h ober eveldon-me, a lavare hano *Jezuz* en eur zavel ho daoulagad varzu an env. »

Ear micherour, Philipp Wartz, deuz parrez Meudon, soudard er 60 chasourien, en deuz skrivet evelhen d'he bersoun :

« Ao. Persoun ker, tizet oun bet eun neubout, d'an 29 a viz Du, p'edon o labourat gant ar vaionetez var dachen Ecurie (Pas-de-Calais). Ar voulet e deuz great eun ero, merket var kroc'hen va c'hof; ac'hano ez eo rinklet var va c'hrist a ioa e godel va c'hapoten, n'a petra ta var va c'haloun. Ar grosz zo bet brevet ha va liziri treuzet.

» Ne ket traou a vanko d'inn da gaout sonj euz ar vrezel. Chanz e m'ez bet adarre. E c'hellit kredi, e trugarekean an Aotrou Doue da veza va dionallet ken mad... Kaset oun bet d'an hospital, hag aman ar Seurezed a ra stad ac'hanomp... Union a bedennou ato, Ao. Persoun ker, evit m'e devezo ar Franz ar peoc'h goude ar viktor ar c'henta posubl, ha ma tiz-troimp d'ar gear ar muia posubl. »

* * *

Absolven an douger-drapo. — An douger-drapo he unan eo en deuz skrivet kement da Gazeten Eskopti Guened :

« Eun neubout heurion n'ez ken abaoe m'e m'ez santet, araok mont var an dachen a vrezel, va c'haloun o tridal gant ar joa vrasa e m'ez bet e va buez. Harpet gant va dourn kleiz var va drapo, e m'ez dizonjet eur pennadik ez oun soudard. Roet e meuz an absolven jeneral d'ar zoudarded, kuchen dre guchen. An oll vozed-ze, kourachek evel leoned bremaik enn emgann, a ioa an dour en ho daoulagad. Great e m'ez dezho eun tamm prezegen ver, glep ive va daoulagad ha va mouez brevet. Neuze oll, daoulinet, o deuz lavaret an akt a gontrition. Bizkoaz, m'oar vad, n'o deuz resevet ken puil gras an absolven. Ha me, dastumet ganhen e goeled va c'haloun kement e m'ez a garantez evit Doue hag an eneo e deuz krouet ha prenet, e m'ez savet va dourn hag e m'ez savet va breac'h evit rei ar pardoun. An oll pennou a zoublaz, memes ar re a ioa boaz, e mareou all, da c'hoapât ha da vlatfemi. Hag oll e savjont neteat,

skanvoc'h, ha gant eur gourach brasoc'h evit mont d'an emgann. »

* * *

Soudarded bleset o deuz kountet d'an Ao. Ponsard, beleg-infirmier e Dijon, eun absolven all, a lakeaz ar c'halonou biannoc'h c'hoaz.

Eur rejimant a bez a ioa gourvezet var an douar evit en em ziuall guelloc'h dioc'h tan mitrailleuz an Allemanted. Ar zoudarded a lavaraz da unan euz ho c'hamaladed : « Beleg, ro deomp an absolven ». Ar beleg-soudard a zav en he zav raktal. A veac'h m'en doa lavaret komsou ar Zakramant ma oue trouc'het e daou gant eun taol obus.

Ar beleg-ma a ioa euz eskopti Mende. N'oa beleg nemed abaoue neubent dervezion.

* * *

Evesaomp aman n'ez eo mad an absolven jeneral, ep ar govesion, nemed pa vezer en eunn danjer braz ha pa ne c'heller ket kovez. Ar re o devez bet an absolven-ze a dle, kenta tro ma 'z int da govez, diskleria ar pec'hejou pardounet dezho evelse.

* * *

An dud a iliz er vrezel. — Lizer an Ao. Recald, eskopti Bayonne :

« Var va zac'h eo e skrivan deoc'h. Var an dachenn a vrezel e maoump; aman eo tomm ar zouben. N'hellan ket lavaret deoc'h e pe leac'h.

» *Disadorn diveza, euz bet goulennet nao zen a volonte vad evit mont da zevel ar re vleset var linen an tan... Nao beleg, eiz all ha me, on deuz goulennet mont.*

» *Abaoue, mantruz eo ar pezh a velomp hag ar vicher a reomp, ... mes konsolant ez eo ive. Gourvez a rankomp ha bale var hor parlochou, evit mont dindan ar bouliji hag an obuzou da gerc'hat ar re vleset. Unan euz an devezion-man, e klefot ez oun bleset... pe lazet. Evel ma plijo gant Doue !*

» *Ne reer mui van ebet pa veler anaoudegez vad ar re vleset hag ho joa pa glevomp ez oump belseien.* »

* * *

Koveseat en trancheou. — En unan euz hon trancheou, eur beleg serjant a zo chouchet gant he zektion. Euz an tranche tost a teu, gant ar brasa evez en eur vont var he grabanou, eur tammik soudard bian, n'ez oa beleg ebed en toull m'edo kuzet enghan.

En em gaout a ra, ep ma vije tizet gant an tennou, beteg bord an toull m'edo enghan ar serjant beleg. Heno, astennet, he fri arp oc'h an douar, e c'halv izel izel he vonez :

« Salvan, aze e maout ?

— » Ia, eme ar serjant, petra fot d'it ? Bremaik e vezi diskaret ! M'ar bezez guelet gant an Allemanted, out sûr da baka da stal.

— » Neubentoc'h a gomson, eme ar zoudard ! Va c'hovez a helfez ?

— » Ia, dioc'htu.

— » Ia, mes n'hellan ket mont var va daoulin, « digillet » e ven dioc'htu.

— » N'eo ket red ; chomm evel m'e maout. »

Heno, gourvezet a-zioc'h an tranche, e kovez he bec'hejou d'ar beleg-serjant hag ar zoudard bian a zo pardounet dezhan he bec'hejou gant an Aotrou Doue. Distrei a ra neuze d'he bost, oc'h en em ruza gwestadik arp oc'h an douar evel eur vuzugen.

* * *

Pa ne vez ket a veleien e vez galvet kloareged. — Lizer eur c'hloarek a eskopti Orleans :

« Var goulennet kalz soudarded euz ar goampagnunez, al letanant en deuz goulennet diganen lavaret eur beden publik evit hor c'hamaladed kuzet var an dachen. Ar re c'hraded en em zastumaz e lok al letanan, hag e lavarjomp asamblez eun dizenez chapelled, eun orezoun evit an anaoun, hag an *De profundis*. Mont a riz da ober ar memes tra e peb sec-

tion. Evit ma vije entetet guelloc'h ar pedennou, e tistroiz anezho dirazho deuz al latin.

» Libr oa peb unan da bedi pe da jomm ep pedi. Oll ec'h en em lakajont var ho daoulin. Er penn kenta, meur a hini a respounte gwestadik; mes dizale an oll a bede a vouez huel hag a greiz kaloun. Ha me en em zante *beleg araok beza beleget*. Evit ne vezot ket souezet o klevet e oue goulennet diganen lavaret ar pedennou evit hor c'hamaladed maro, e *rankan lavaret deoc'h n'euz kloarek ebed er vataillon nemed honms.* »

PEDOMP A ZEVRI

Providanz an Aotrou Doue a c'honarn ar bed gant eur farnez parfet hag eur vadelez dreist-ment. Gousskoude daoust pegen braz eo he vadelez, Doue n'hell ket dizonjal ez eo eun Doue just, a ganthan peb hini a gav dioc'h ma ra.

Kalz tud zo ne zonzont ket en dra-ze, ha souezet e vezont ne rofe ket, dioc'htu, an Aotrou Doue kement a c'houlennont diganhan. Setu ar pezh en em gav alies en amzer-ma.

Ar Franz e deuz choazet, a bell zo, tud difeiz d'he gouarn, tud ha n'o deuz nemed kasouni enep an Aotrou Doue, tud ne ouezont nemed ober brezel dezhan, ne glaskont nemed miret e ve anavezet gant ar vugale, servichet gant an dud en oad, ha ne reont nemed diframma diganhan an eneoù en deuz kronet, envel outhan, prenet gant priz he c'hoad, evit rei dezho he varadoz.

Ogen an Doue oll-galloudek a rank beza just, hag an ofansou great enep dezhan a rank beza digollet. Evit-ze, an Aotrou Doue n'en enz ket izoum da lakat he zourn da boneza pounner var an dud; n'en euz nemed ho lezer ho unan. Ep Doue, n'euz farnez ebed; an dud, tonellet gant ho ourgonill, gant ho goal iou-

lou, o klask sevel an eil dreist egile, ne ouezont nemed en em zrailla, en em laza ken etrezho. Ma ne ve Doue nemed just, ne ve fin ebed d'an draillerez-ze.

Mes Doue, ma rank beza just, a jomm ato Tad ha Tad karantezuz. Rei a ro deomp peadra da baea d'he Justiz an die on deuz kemeret dirazhan dre hor pe-c'hejou. Dasket en deuz deomp he unan ar galloud o deuz evit kementze ar beden hag ar binijen.

Ep mar, pounner eo samm pec'hejou ar Franz, e deuz bet gousskoude merkou ken kaer a garantez Doue evithi. Eaz eo eta koumpren ne ket o pedi eun dervez, pe eiz dervez, e vo digollet Justiz Doue ha paet aoualc'h evit kement a bec'hejou hag a zizprij anezhan.

Ne skuizomp eta o pedi; pedomp bemdez, pedomp en hon part hon unan, pedomp en hon tiegeziou, mes pedomp dreist oll en hon ilizou o kemeret perz er pedennou; great en hano ar vro a bez.

Lakeomp a du ganeomp ar Verc'hez Vari, Mamm Doue, sant Jozeph, sant Mikeal hag an oll zent ha zentezet o deuz hed ar veaj skoaziet ar Franz.

AR BEDEN HAG AR VIKTOR

Diouallomp na deufemp da falgalouni er beden ha da zonzal evel meur a hini, a lavar: « Kaer on deuz pedi, Doue ne zillaou ket ac'hanomp ».

Da lavaret guir, ne viritomp ket beza silaouet; re on deuz great enep Doue. Mes en despet da gement-ze, ma pedomp Kaloun Jezuz gant aoualc'h a fisianz, ar pezh 'zo en em gavet abaoue ar penn kenta ar vrezel a ziskuez skler aoualc'h e fell da Zoue pardouni deomp hag astean deomp he zourn gant madelez.

Roet en deuz d'hor bro ken sklear he skoazel er vrezel-ma, m'en deuz skrivet eun den a farnez, ez

eo eur vrezel a virak'lou. Evit startât hor fisianz ha rei deomp muioc'h a gouraj da bedi, evesaomp ouz daou zra a zizkuez deomp sklearoc'h dourn an Aotrou Doue : emgann ar Marn hag hini Ardagan enep an Turked.

Goude krogad Charleroi, an Allemanted a gerze divar er varzu Paris ; oc'hpenn dek leo bemdez a reant. D'ar iaou, ar jeneral *en chef* a roaz eur merk a fisianz da Jeanne d'Ark. An dervez varlerc'h, 4 a Vengolo, a ioa ar guener kenta. Epad m'edo adorationien Pariz daoulinet o pedi ar Galoun-Sakr en iliz-veur Montmartr, an Allemanted a ioa deuet tost da forziou Pariz varned dion leo.

Setu souden, n'ez eont mui arak hag e trojont krenn hag e tisrojont dioc'h Paris. Perak ? Hor jeneraled ne deuont ket abenn, memes hirio, da gompren perak.

D'ar zul 6 a viz Gwengolo, e koumanse an triduum evit honori santez Jenovefa, patronez Pariz. En dervez-ze, ar vech kenta, e rankaz an Allemanted kila dirazomp. D'al lun, 7, e rankhont c'hoaz mont muioc'h adren. D'ar meurz 8, deiz Ginivelez ar Ver-c'hez, e vez douget relegou santez Jenovefa e procession. En dervez-ze, an enebourien a rankaz mont 10 leo var ho c'hiz. Ar c'hrogad a badaz ac'hondevez beteg ar zul varlerc'h, gouel Hano Santel Mari great e memor d'ar viktor var an Turked er bloaz 1683. En dervez-ze, ar jeneral Joffre a c'hellaz diskleria dirak an oll oa gounezet viktor ar Marne. O velet an traou-ze, hag eun den leal a c'hell miret da lavaret : « Aman e ma dourn Doue » ?

Guelomp breman evit viktor ar Russed var an Turked. Roue Bro-Zaoz en doa goulennet e vije great pedennou publik e Bro-Zaoz, e Franz, hag er Russi en hano an teir vro. Var goulenn an Ao. kardinal Bourne, arc'heskop e Bro-Zaoz, oll eskapien Franz a asantaz hag ar pedennou a oue great en hano an teir vro. D'an 3 a viz Genver oa. Ar pedennou-ma a ioa guir pedennou *national*.

Ogen en dervez ma pedemp evit ma c'hounesfe ar-

meou an teir vro a unan, ar Russed a roe eur zaead dispar d'an Turked, a rankaz tec'het. Antronoz, eur maread euz ar re-ma a oue prizouniet. Hou-man zo bet ar viktor gaera gounezet abaoe m'eo digoret ar vrezel.

Pion a c'helfe c'hoaz lavaret, goude merkou ken sklear a skoazel Doue, e ve dinerz ar pedennou, dreist oll ar pedennou galvet *national* pe great gant ar vro abez en eur vouez hag en hano ar vro ?

Dalc'homp 'ta da bedi ep falgalouni. Arabad e lesfemp da zont en hon eneo an disterra difisianz a vadelez Doue. Anzavomp gant lealded ez eo bet Doue ofanset dreist konnt ganeomp ha gant hor bro ; stouomp izell hor penno dirazhan, ha goulennomp pardoun ep skuiza. P'on deveza paet aonac'h hon dle da Justiz Doue, e teui evit mad dervez he vadelez, hag ar Franz treac'h d'he enebourien digernez e devezo ar peoc'h, hag a vo adarre savet ken huel ha bizkoaz.

AN AOTROU KARDINAL MERCIER PRIZOUNIET GANT AN ALLEMANTED

An Ao. Kardinal Mercier, arc'heskop Malines, kenta eskop ar Beljik, en doa kaset d'he gristenien fidel eul lizer a bastor a dlie beza lennet en oll ilizou an eskopti, d'an deiz kenta er bloaz ha d'ar zul varlerc'h.

Goude beza diskleriet stad truezaz ar Beljik, an Ao. Kardinal a lavare :

.....Doue a zaveteio ar Beljik, va breundeur, n'hellomp ket kaout douetanz var gementze. Lavaromp zoken e ma oc'h he zavetei. N'euz ket unan euz ar re a gar ho bro ha ne ve ket foug ennan gant ar pezh e deuz great ! Pini ac'hanomp ne ve ket lorc'h ennan o velet pebez gloar e deuz gounezet hor bro blounset ?

.....Ar Beljik a dlie, evit he honor, en em zionall dishual ha brezellekât evit kementze. Dalc'het e deuz d'he ger. Ar broiou all a dlie miret ne vije breset gant enebour ebed, roet o doa ho ger evit kementze. An Allemanted zo eat enep ho ger ; Bro-Zaoz e deuz dalc'het mad. Setu aze penaoz e ma an traou.

Ac'houdevez an Ao. Kardinal a lavar d'he bobl kristen petra dleont d'ho enebourien :

An Allemagn n'e deuz varnoc'h guir ebet. E guelede ho kalonou ne dleit dezhi nag istim, na karantez, na sentidigez. N'euz guir galloud ebet er Beljik nemed galloud hor roue, hor c'honarnamant, hag an deputeed on deuz choazet. Setu aze ar re a zalc'h dirazoc'h ar guir aotorite. Ar re-ze epken o deuz guir e ve sentet outho hag e vent karet ganeoc'h... Mes al loden euz ar vro, a zo breman an enebourien ar vistri enghi, a dle beza leal en ho c'henver. An darn vuia euz hor c'hearliou o deuz pleget dirzho. Dalc'het int da viret ar c'honditionou o deuz asantet dezho.

Hon arme, hi epken, o vrezellekât e ma hi gant armeou kalounek hor mignouned, a dle difen hon honor hag a zo karget da zifen hor bro. Ni dle gedal diganhi hon dilivranz.

Ar c'homsou-ze, ken kaer ha ken leal, o deuz lakeat an Allemanted da vont enn egar. Furchet o deuz en holl presbitaliou evit klask tapa al lizer, hag e traou peb kador sarmoun o deuz lakeat soudarded gant ho fuzuilhou evit miret ne vije lennet. Goasoc'h o deuz great, an Ao. Kardinal a zo dalc'het gantho prizouniet en he di diouallet gant ho soudarded.

Oll katoliked ar bed n'o deuz nemed eur vouez evit tamall eun dra ken divalo. Kement e ra an Allemanted a draou euzuz, ma teu an oll er broiou dianveaz da veza enep dezho.

Evit an Ao. Kardinal Mercier e vezo evit ato eun honor da veza bet prizouniet abalamour m'en deuz kredet lavaret komsou evit difen ar justiz hag ar virionez.

AN TAD SANTEL AR PAB

Gant ar c'hoant birvidik en deuz da zousât poanion ha darvoudou ar vrezel, an Tad Santel ar Pab en deuz skrivet da c'honarnamant kement bro 'zo o vrezellekât, evit goulenn diganthe ma vo great trok etre ar brizounierien n'int mui gwest da zougenn ar-mou.

Oll o deuz asantet d'he c'houlenn. Sonjal a reer e Roum e tistroio d'ar gear dek a seiz ugent mil (150 000) prizounier, dre an aked en deuz bet Hon Tad Santel ar Pab evitho.

Eur c'helou all a zo deuet en deveziou-man deuz Roum. Hon Tad Santel en deuz gourc'hemennet e ve great eun dervez pedennou, dre ar bed oll, dirak ar Zakramant meulet ra vezo, evit goulenn ma teul afo ar peoc'h. An dervez merket evidomp-ni tud an Europ eo sul ar Sexajesim, 7 a viz C'huevrer ; hag evit ar broiou all, sul ar Basion 21 a Veur.

An Tad Santel en deuz great he unan eur beden da veza lennet en dervez-ze dioc'h ar pardaez dirak ar Zakramant meulet ra vezo.

Peden evit ar peoc'h.

Goasket gant darvoudou eur vrezel, a zastum ganhi, evel eur gorventen, tud ha poblou a bez, ni glask, o Jezuz, goasket en ho kaloun, a skuill var an dud ar garantez a verv enghan evitho. Doue a drugarez ! Grit m'ac'h echuo dizale ar voalenn dreistment-ze ; ni her goulenn gant tiz diganeoc'h, en eur huanadi e guelede hon ene.

Roue ar peoc'h, diganeoc'hui eo e c'hedomp, dre hor pedennou ar peoc'h a c'hoanteomp. Guechall, deuz ho kaloun eo e tarzaz ar garantez var ar bed, evit ma renne, peb enebiez mouget, ar garantez epken etouez an dud ; c'hui eo epad ho puez var an

douar, o peuz bet an druez birvidika evit darvoudou an dud.

Ra zeui ive ho kaloun da druezi ouzomp er marema ken grevuz evidomp, er mare-ma ken glac'haruz a gasoniou kriz hag a c'hoad skuillet. O pet truez ouz kement a vammou enkrezet var gount ho bugale, truez ouz kement a familhou kollet gantho ho zadou, truez ouz ar paour keaz Europ, flastret gant kement a zizmantr. Roit d'ar re a c'houarn ha d'ar boblou kuzulioù a furnez; lammit ar pezh 'zo an abek euz an disparti a laka brezel etre ar boblou; grit ma reno adarre ar peoc'h etre an dud, o c'hui hag o peuz, en eur skuill ho koad, great breudeur ac'hanomp! Evel, eun dervez, o respount d'an Abostol sant Per a grie ouzoc'h: « Saveteit ac'hanomp, e maoump o vont da goll », o peuz lakeat sioul ar mor kounnaret; evelse respountit ive d'hor pedennou birvidik, ha roit d'ar bed dismantret an akord hag ar peoc'h.

AN TRIDUUM E PONTMAIN

Lennerien ar *Channad* o deuz sonj da veza lennet, e *Kannad* miz Here, ar pezh a c'hoarvezaz e parrezik Pontmain en eskopti Laval, d'ar 17 a viz Genver 1871. Ar Brusianed, treac'h d'hon armeou, a rea ho mistri e Franz hag a venne sailla var Bro-Breiz. Edont varnez kemeret kear Laval var arzon Breiz, pa oue klevet souden e kilent, ne ouie ket perak. Ar jeneral Prusian a rea he gount da zailla var kear Laval a zizkleriaz neuze: « N'hellomp mui mont arak; eun Itron (Madone) a vir ouzomp ». An Itron-ze, ar Vadôn ze oa ar Verc'hez Vari a ioa en em zizkueze; da pevar bugel e Pontmain, hag e doa kemennet dezho ec'h achufe ar vrezel dizale.

Kaloun Mamm Doue n'hell ket beza chenchet

abaoue. Setu perak Aotron 'n Eskop Laval a c'hourc'hemennaz ez achet da bardouna da Bontmain, d'ar 17 a viz Genver diveza, evit goulen digant ar Verc'hez Santel skoazella adarre Bro Franz ha Breiz, evel m'e deuz great pevar bloaz ha daou ugent-zo. Gourc'hemen a reaz ive e vije tri devez pedennou arak delz ar pardoun, 17 a viz Genver.

Pedi a reaz oll katoliked Franz da gemeret perz er pedennou; ha kalz parrezioù o deuz ho great.

E Pontmain, da zeiz ar gouel, ez oa ouspenn eiz mil den o pardouna, ha tri eskop: eskop ar Mans, eskop an Naoned hag eskop Laval. A villerou e oue tud o kommunia.

Ar bobl tud-ze a dride gant an esperanz, en eur glevet Aotron 'n Eskop ar Mans o prezeg var ar c'homson-ma: « *Spes nostra, salve*, Salud deoc'h, c'hui hon esperanz ». An oll a c'houennaz pardoun evit ho fec'hejou pa glevjont Ao. 'n Eskop an Naoned o tiskleria, dudiuz, poanioù Jezuz var ar Groaz Da venediktion ar Zakramant, e oue great gant ar bobl oll pedennou hag aspedennou ken truezuz ma reant d'ar mammoù ha d'ar priedoù huanadi ha skuill daelou, en eur zorzjal en ho zud dindan tan an enebourien. Ar pedennou hag aspedennou ze a felle dezho, a grenn, obten digant Kaloun Jezuz dre Galoun Mari ar zilvidigez hag ar viktorev ar Franz.

Penaoz ne ve ket fisianz e vo saveteet ar Franz pe guir, eur vech all, pevar bloaz ha daou ugent zo abaoue, e teuz Itron Varia Franz da Bontmain da zigaz dezhi ar zilvidigez? Mes red eo e pedfe ar Franz Itron Varia Pontmain.

Ia, ar Franz a bedo, hag ar Verc'hez Vari ne deuz ket ankounac'heat ar bromesa a reaz d'ar 17 a viz Genver 1871. Ar promesa-ze a zalc'h ato: « *Mes pedit, pedit, va bugale, Doue a roio deoc'h dizale dizale. Va Map a lez ar vadelez da c'hounit he Galoun.* »

Hag ar pezh a ro deomp, c'hoaz, muioc'h a fisianz eo ma pede an Tad Santel ar Pab a unan ganeomp da zeiz pardoun Pontmain. Eun depêch digaset euz he berz d'an Aotron 'n Eskop Laval a zo deuet da

lavaret ec'h en em unane Hon Tad Santel gant pe-
lined Pontmain o pedi evit ar Franz.

AR 40 HEUR

Er miz ma ec'h en em gav pedennou ar 40 heur. Epad an deizioù ened, arabat e ve dizurz ebet en nep leac'h, ma fell deomp en defe Kaloun Jezuz truez ouzomp. Red eo e ve an tri devez-ze tri devez santel, hag e ve tud en ofisou, tud o c'houlen pardoun dirak Hor Zalver, leun hon ilizou. Deskomp anaout mad madelez an Aotrou Doue, en eur blega izel, ni paour keaz pec'herien, dirak he zantelez hag he c'halloud ep muzul.

TINZOR KALOUN JEZUZ

Kinniget ha great a unan gant Kaloun dinam Mari ha gant Sant Jozeph

EVIT MA C'HOUNEZO AN ILIZ VAR HE ENEBOURIEN


HA MA RENO AR GALOUN SAKR.

Aktoù a Garantez.....	3.001	Oferennoù klevet.....	1.399
Chapeledou.....	2.066	Pedennou gant evez....	1.866
Hent ar Groaz.....	295	Lenn heuriou devot.....	192
Kommunioner Zakramant	870	Poaniou gouzanvet.....	816
Kommunion a garantez .	2.651	Bizitet ar Zakramant....	1.816
Examin a goustians.....	599	Pinijennou.....	1.636
Heuriou labour.....	2.291	Trec'het ar defet goasa .	116
Heuriou tevel.....	878	Total.....	20.528

Kement hini a ginnig oberiou en intantion-ma n'o deuz nemed skriva an niver anezho da Ao. Persoun Guitalmeze.

Le Gérant : Pierre DURAND.

Kemper, e ti DE KERANGAL, mouller an Eskopti.



(troun Varia ann Abostolaj).